


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn.....	2
	Petra nevez ?	8
	Kelaouennoù.....	18
	Notennoù	30

Herve LATIMIER

**Atonement of Blood, A
Sister Fidelma Mystery,**

gant Peter Tremayne,
Headline emb., 2014,
352 bajenn, 10€




24^{vet} levr avanturioù Fidelma ! Klasket ez eus bet lazhañ Cogù, breur Fidelma. Ar muntrer a huchas « Ho pet soñj eus Liamuin ! » n' ur reiñ e daol kontell ha mervel, lazhet gant Caol, penn gward ar roue... Setu Fidelma hag Aedulf war an hentoù adarre evit klask kompren piv en doa itriket ar gwall-daol ha perak. Politikel

eo an abegoù. Luziet an traoù evel-just. Darvoudoù e leizh. Adkavout a reer kalzik tudennoù bet e darempred gant an harozed c'hoazh. Kendalc'her a ra emzalc'h Fidelma da gemm tamm-ha-tamm. Ur plas a vez roet da Alchù, he mab... Gwir eo, n'eo mui leanez ken daoust ma lenner « *A sister Fidelma Mystery* » war golo al levr

c'hoazh. Ne vezer ket souezhet gant framm an istor met lenn a reer al lev'r gant plijadur ha

c'hoant gouzout disoc'h an enklask.

The Wealth of Nations
Books I-III,
 gant Adam Smith,
 Penguin Books, 1999,
 572 pajenn, £9.99



Lenn Amartya Sen (so. AL 358, 368 ha 402) en deus broudet ac'hanon da lenn Adam Smith.

Evel kalz a dud em boa desket traoù a-zivout an den hep bezañ lennet war-eeun e oberennoù.


Gwelet eo evel unan eus tadoù an “ekonomiezh klasel” hag ar frankizouriezh. Luzietoc'h eo an traoù evel-just. Ouzhpenn bezañ ekonomour e oa istorour (levrenn III *The Wealth of Nations* en diskouez anat, lodennoù all ivez), sokio-logour a-raok ar c'houlz, prederour ha buhezegour. Ma klask displegañ gwikefre ar prizioù hag ar c'hresk ekonomikel, ma tiskouez bezañ enep ar reolennoù a vir ouzh an

ekonomiezh da gavout he lusk reizh n'heller ket kavout en e breder ar sell dizenel ha didruez a gaver er “frankizouriezh” a-vremañ. Un dra a c'heller kavout eeunik eo ar sell gwell-welus en deus : lezit gwikefreoù an ekonomiezh da vont dishual hag e kavo eznaturel he c'hempouez evit brasañ mat an holl... Ar plas a ro d'al labour-douar a zo diamzeriet evel e dermenadur eus ar pezh a zo frouezhus hag ar pezh n'eo ket. E sell war an tiez-bank a lakaje anezhañ da spontañ ma welje ar gapitalouriezh a-vremañ. Alies e skriv enep an drafikerien hag e toug bri d'ar “sober and frugal”. Meur a wech e tiskouez bezañ evit lezennoù a ro tro d'al

labourerien da c'hounit o bara rak « *No society can surely be flourishing and happy, of which the far greater part of the members are poor and miserable* » (p.181) hag « *Avarice and injustice are always short-sighted* » (p.493). Gwelout a ra an arc'hant dispignet evit lakaat da greskiñ barregezh izili ar gevredigezh evel ur postadur frouezhus (p.377) hep arvar. Ur preder pinvidik, digor ha ket

ken yen hag a c'heller krediñ pa glever azeulerien ar marc'had a-vremañ. Ne lavarin ket ez eo *The Wealth of Nations* ul levr aes da lenn. Sikouret on bet kalz gant digoradur an aotrou Andrew Skinner, kelenner e Skol-veur Glaschu (evel m'eo bet Adam Smith). Un dra vat eo lenn oberennoù evel ar re-mañ evit chom hep eeunaat betek re preder an aozourien.

Elegy for April, A new Quirke Dublin mystery,
gant John Banville dindan
anv Benjamin Black,
Picador, 2011,
344 fajenn, \$15.00




Prenet em boa al levr-mañ peogwir ez eus kaoz ennañ eus ur familh Latimer... Un enklask a zo met dreist-holl un aergelc'h, hini Dulenn er bloavezhioù 1950. Daremprediñ a reer el levr metoù bourc'hiz ha bihan-bourc'hiz : ur ministr, medisined... hag un enseller polis. N'eus ket bet keloù abaoe ur pennad eus April Latimer, ur

vignonez da Phoebe merc'h an Doktor Quirke. O klask anezhi e lakaer war-wel sekredoù familh eus ar spontusañ. Quirke, an "haroz", a zo alkolek da vat. Kalz butun hag alkol a gaver en istor. Santet e vez an diforc'hioù sokial, metoù un tamm pilpous ar gouarnamant, levezon ken pilpous all emsavadeg 1916 a ra eus tud zo harozed un tamm

buan. Ganet eo bet John Banville e Wexford e 1945, gounezet en deus meur a briz hag *Elegy for April* zo trede romant istorioù Quirke e Dulenn. Ur sell disheñ-

vel war gêrbenn Iwerzhon, teñval ha kazi dic'hoanag. Da vezañ lennet abalamour d'ar sell-se...


**Sans verser de larmes,
Une enquête de
Mary Lester,**
gant Jean Failler,
Palémon, 2008,
416 pajenn, 8.00€



Ar wech kentañ eo din lenn unan eus enklaskoù Mary Lester. Dre zegouezh. Muntr un den dispiljus a-walc'h. Ar muntrer kavet war ar plas gant an archerien... Met ne seblant ket an traoù ken sklaer-se d'an holl ha kaset eo Mary Lester d'ober un enklask. Evel-just e vo disheñvel-kenañ he c'havadennoù eus ar pezh a soñje d'an archerien hag un diskoulm a vo er fin... Netra da lavarout diwar-benn an istor, savet mat, kalzik darvoudoù, un doare fent (an darempredoù etre poliserien hag archerien da skouer). Goût 'oar Jean Failler e vicher. Dipitet on

bet gant traoù zo : n'eo Breizh nemet un endro evit an istorioù, tra ken, ha kavet em eus ur vMary Lester nasionalist gall ha kentoc'h mirourez ma n'eo ket gwashoc'h (pp.283-284) hag ur spered enep sindikad "kentañ derez" gant tudenn Anika Niche hag an doare ma skriver diwar he fenn (p.363). N'ouzon ket hag-eñ e kaver seurt arlivioù e holl avanturioù ar gapitenez. Daoust din bezañ lennet buan ha gant plijadur an istor ne vo ket levrioù Failler e penn ma listenn ma c'houlenner diganin kinnig ar romantoù polis a blij din ar muiañ.

**Comment peut-on être
Alsacien ? Essai sur
l'identité française,**
gant Pierre Klein,
SALDE, 2012,
138 pajenn, 12.00€



Prezidant *Initiative citoyenne Alsacienne ICA 2010* eo Pierre Klein. Mont a ra e levr war dachennoù preder tost eus re Morvan Lebesque, Jean-Michel Le Boulanger pe Yvon Ollivier diwar-benn an identelezh, ar meizad, an identelezh vreizhat, an identelezh elzasat hag hini Frañs evel-just. Dedennus eo mennozhioù Pierre Klein war an identelezh, an arallded, Frañs (*En guise d'introduction ; De la construction identitaire française ; Identité, identités, un concept nouveau pour une nouvelle politique*). Gwelout a reer e ya kalz prederiadennoù war memes tu en tu-hont d'an arlvioù degaset gant pep skri-vagner. Al lodennoù a-zivout Elzas (*De la construction identitaire alsacienne ; Fractures alsaciennes ; Etre alsacien aujourd'hui, une condition vécue, subie, posée...*) a zegas

ur sell war perzhioù dibar istor Elzas, doareoù Elzasiz da vevañ pe da nac'h o identelezh elzasat. Gellout a reer keñveriañ gant Breizh hag ar Vretoned, gwelout an heñvelderioù hag an disheñvelderioù.

**Histoire de l'écologie
en Bretagne,**
gant Tudi Kernallegenn,
Emb. Goater, 2014,
184 fajenn, 14.00€




Ul levr a zle bezañ e levraoueg pep Breizhad chalet gant dazont ar Vro ha gant hini ar Bed.

Ul levr a ouiziegeh eo hag ul levr a stourm ivez. Sklaer : chabistroù berr, kalz skeudennoù, taolennoù kentelius, kartennoù gant Mikael Bodlore-Penlaez, doare fichennoù dedennus-kenañ. Desket e vez kalz traoù, adkavet traoù bet bevet met lakaet mat e red an istor hag emdroadur ar mennozhioù. Anat eo al liamm etre ar stourm evit personelezh


Breizh hag ar stourm ekologel, dont a ra anat ivez dre ma lenner al levr e tleer kemm doareoù an ekonomiezh ma ne fell ket deomp kas ar bed war un hent-dall. Tu stourmer al levr a gaver dreist-holl er fin : an teuliad ugent pajennad a-zivout Kernitron-al-Lann ha testeni Denez Lhostis. Ober a ra Tudi ur galv e fin an oberenn gant pal un eil embannadur gwellaet. Ra vo selaouet !

PETRA NEVEZ ?



**Stefan CARPENTIER &
Malo BOUESSEL du BOURG**

Ar Prosez,
gant Franz Kafka,
troet diwar an alamaneg
gant Gérard Cornillet,
An Alarc'h embannadurioù,
328 pajenn, 13,50€



A-raok mervel gant an droukskevent, hag eñ yaouank c'hoazh, en doa goulennet Franz Kafka (1883-1924) digant e vignon Max Brod distrujañ e holl zornskridoù diembann. Dre chañs ne sevenas ket Max Brod e c'hoant ha lakaat a reas embann *Ar Prosez* e 1925 e Berlin, bloaz goude marv an aozer. Un tamm urzh en deus

lakaet Max Brod er chabistroù ha lakaet en deus a gostez al lodennoù hag a oa diechu da vat. Met an oberenn en he fezh, tost da vat, a zo deuet betek ennomp.

Joseph K., penndudenn *Ar Prosez*, a zo anezhañ ur bourc'hiz bihan. Labourat a ra en un ti-bank ha ren a ra ur vuhez unton hag emgar gouestlet d'e

red-micher. Da zeiz e dregontvet deiz-ha-bloaz e teu daou archer da lakaat harz warnañ en e ranndi. Ne oar ket petra zo rebechet dezhañ ha talañ a ra ouzh ur prosez digomprenus ha didermen, kollet e milendall ar justis hag an dud a lezenn. Doriou, trepasou ha skalieroù a baot a-hed an dezrevell... Goude bezañ klasket en em zifenn, e teu Joseph K. da asantiñ d'e gablusted mod pe vod... Daoust pegen mougus e ve kavet aergelc'h *Ar Prosez*, hag hirik a-wechoù an destenn (ar pennad 8 da skouer), e lenner ar romant-se gant kalz a blijadur. Joseph K. eo intret e avanturioù gant fent kriz an aozer. Ur seurt luerezh bourdus m'eo mesket poellerezh ha diboellerezh : « traoù mekanek pladet war traoù bev », liz da Bergson. Ur meni barzhoniezh fantastik a sav ivez eus kenstok diehan ar poell hag an diboell.

E meur a zoare eo bet degemeret romant Kafka. Lod a wel ur varnadenn eus ar vureveliezh hag eus ar reizhiad lezvarnel : ar varnerien, an alvokaded, ar gargidi... Ar re ziwezhañ-se, « dre ma chomont klozet-holl, dalc'hmat, deiz ha noz, e framm o lezennoù, n'o


deus tamm kizidigezh ebet evit ar pezh a sell ouzh an darempredoù denel... ». Lod all a verz er skrid ur raganaoudegezh eus hollvelouriezh ar renad komunnour e broioù ar reter. Tud zo o deus diguzhet damveneg an enepyuzevouriezh o c'hounit tachenn. Ar ger "yuzev" ne gaver roudenn ebet anezhañ en destenn, evel pa vije ur ger berzet, daoust ma vez kavet puilh e karnedoù hag e lizhiri Kafka. Klask a rae familh Kafka enteuziñ er gevredigezh. Kement-se a voe bevet evel ur c'holl identelezh gant Kafka. Harluad ha divroad en em sant, dres evel penndudenn *Ar Prosez*. Al lizher en doa skrivet Kafka d'e dad (ha n'en deus morse kaset dezhañ evelato) a daol ur sklêrijenn vredelfennadel war gudenn ar gablusted, a santer dalc'hmat er romant. Sed a skrive a-zivout e dad : « En em gavout a raed kastizet endeo en ur mod, kent gouzout hor boa graet un dra fall... ». Tud all, da vare Camus ha Sartre, o deus adkavet er *Prosez* nannster ar vuhez, hag an diaes m'eo skoulmañ darempredoù gant an hentez : «An ifern eo ar re all... » Holl dudennou romant Kafka a seblant talañ ouzh o

frosez dezho o-unan pe ken-labourat da brosez ar re all, mod pe vod. Lakaet omp da gablus gant ar gevredigezh, gant ar relijion, gant ar Stad, gant an tonkad... Joseph K. n'en deus ket nerzh-kalon a-walc'h d'en em zieubiñ diouzh ar reizhiad hollc'halloudus-se.

Nerzh ar gwengelioù zo gant an oberennoù meur. Dasseniñ a reont en ur mod disheñvel a goulzad da goulzad e kreizon neb lenner. Met un dra a c'heller reiñ da wir : kement lenner zo a zalc'ho soñj eus *Ar Prosez* a-hed e vuhez.

MBdB

**Geriadur
brezhoneg-euskareg
& euskara-bretoiera,
gant Padrig an Habask,
Embannadurioù Al Lany,
688 pajenn, 18€**




A-vent gant an dorn eo geriadur brezhoneg-euskareg & euskareg-brezhoneg nevez embannet gant *Al Lany* evit « kement euskareger a zesko brezhoneg ha kement brezhoneger a zesko euskareg », « Ur pont etre Breizh ha Bro-Euskal » hervez an aozer Padrig an Habask. Un benveg pleustrek eo. Kavet e vo ennañ ouzhpenn 4 500 pennger brezhonek hag euskarek, reolennoù pennañ an distagadur, evezhiadennoù diwar-benn ar verboù... Un dornad pajennoù a zo bet gouestlet da istor ar brezhoneg (en

euskareg nemetken) ha da istor an euskareg (e brezhoneg nemetken).

MBdB

**Lumen Fidei,
Sklerijenn ar feiz kristen,
Kelc'hlizher Hon Tad
Santel ar
Pab Frañsez,
Brezhoneg gant Paol Kalvez,
Imbourc'h,
87 pajenn, 10€**



E miz 2013, pevar miz goude bezañ bet dilennet, ez embannas ar Pab Frañsez e gelc'hlizher kentañ, *Lumen fidei, Sklerijenn ar feiz kristen*, da geñver bloavezh ar feiz. Evit lavaret gwir, al c'helc'hlizher-se a zo frouezh ur c'henlabour gant ar Pab Benead XVI, hag en doa kaset ar raktres da benn tost da vat. Peurechuet ha klokaet eo bet gant ar Pab Frañsez eta.

C'hoarvezout a ra *Lumen fidei* en un digoradur, ur c'hlozadur ha pevar fennad : *Kredet hon eus er garantez, Mar ne gredit ket ne gomprenot ket, Adroet em eus deoc'h ar pezh am eus resevet, Kempennet en deus Doue ur gêr dezho.*

Ar goulennou a sav en hor c'hempredidi a-zivout ar feiz a zo displeget gant an aozerien,

en ur mod aes da gompren evit an holl, ha pa vefent digristen. Neb lenner aknostek a c'hello ober e vad eus *Lumen fidei*, hep en em santout estren. Ur vrav a destenn verr eo, bet troet en ur brezhoneg resis ha yac'h gant Paol Kalvez.


Lakaet e vez war-wel liam-mou start etre ar feiz hag ar garantez. Ur galv da zont er-maez eus dezerzh ar me eo ar feiz, hag ur skor evit pellaat diouzh kement idol zo, kozh pe nevez, gant ma vo roet digor da zonezon ar feiz en hor c'hreizig-kreiz. N'eo ket enebet ar feiz ouzh ar poell. En em vagañ a reont. Ul lusk eo ar feiz neuze, evit mont en hent, ha skoulmañ darempredoù gant Doue, gant ar bed ha gant an hentez. Sklêrijennet ha ledanaet eo hent

ar vuhez ganti. N'hell ket bezañ anv eus feiz gant neb en em zastum warnañ e-unan. Diazez ur gumuniezh eo ar feiz. Un nerzh dieubiñ a zo anezhi, evit ma vo bravoc'h hag euvuru-

soc'h buhez Mab-den. Galvet eo ar feizidi da dreuzkas kemenadennoù ar feiz en-dro dezho neuze.

MBdB

Kael hag ar gorriganed,
gant Mael Poussolier,
Keit Vimp Bev,
92 pajenn, 6€



Ur c'hrennard eo Kael. Sot eo gant ar gorriganed ha n'en deus ken c'hoant nemet kavout dor o bed. En em roet eo d'ar c'hlask-se gant e amezegez, Zaig, ur vaouez kozh anezhi ken gwrac'h hag eñ gant ar boudoù bihan-se. Dispenn o roudoù a reont eta met treiñ an traoù en un doare ha ne oant ket engortoz anezhañ : bac'het un den gante abalamour d'un teñzor. Diwar-neuze e raint o seizh gwellañ d'e zieubiñ.

N'eo ket re fall ar skrid goude ma vefe diaes lavaret ez eo mat. E meur a lec'h e vefe bet mat krennañ evit reiñ un


tamm muioc'h a lusk d'an danevell. Labour a chome d'ober war ar yezh a-raok embann (levezon ar galleg, vioù-koukoug, plaenaat an dibaboù yezh...). Un dra all, er pennad 14 e teu gant ar boliserien bommoù mod ar Stadoù-Unanet : « Edan arrest ec'h oc'h. Gellout a rit chom mut. Adalek bremañ e c'hell bout implijet a-enep doc'h ar pezh a vo lâret genoc'h, broad ho peus da gavout ur breutaer ! » Ne vez ket lavaret kement-se gant ar boliserien e Frañs. Savet eo bet ar skrid-se da-geñver Priz ar Yaouankiz,

un taol-arnod e oa ha n'eo
deuet na mat na fall. Ne chom
ken da Vael Poussolier nemet

labourat c'hoazh evit gwel-
laat.

SC

Ar chaseour erevent,
gant Patricia Forde &
Steve Simpson,
Keit Vimp Bev,
26 pajenn, 9€




« Pa vin bras e vin chaseour
erevent, » eme krak-ha-krenn an
arzhig. Brav eo ar soñj met dre
ma tibun e hunvre ne hañval ket
an traoù bezañ ken aes ha tra.
Un danevell vihan blijus eo ma
kaver faltazi ar vugale o c'hoari
gant o delwennoùigoù, merc'hod-
dennoù... Brav eo an tresaden-
noù, mat-tre eo ar paper dibabet.

Unan eus bravañ levrioù evit ar
vugale am eus gwelet betek-
henn. En iwerzhoneg e oa bet
embannet evit ar wech kentañ.
N'eo ket skrivet gant piv eo bet
troet siwazh goude ma 'z eus
bet trugarekaet tud zo evit o
skoazell.

SC

Dispac'h,
gant Mikael Madeg,
Embannadurioù Kêredol,
635 pajenn, 33€



Romant ? Mod pe vod. Ur gelaouadenn a zo kuzh dindan an doare skrivañ bet dibabet gant Mikael Madeg. *Dispac'h* a zo anezhañ ur pikol teuliad istorel diwar-benn ar brezel dieubiñ en Amerika hag an Dispac'h bras e Bro-C'hall. En tu all d'an emvuhezskrid kontet d'e vab-bihan gant ar benndudenn Leonat, e lenner un danevell dafaret sonn diwar-benn ar mod ma oa bet bevet an darvoudoù gant an dud er mareoù-se. Lavigañ a ra hon haroz, gwech gant ar re c'hlas, gwech gant ar chouanted, diouzh degouezhioù e vuhez avanturus hag arvarus. Daoust dezhañ kemer perzh en holl zarvoudoù, e chom neptu hag e sach d'e du. Ne oar ket skoulmañ liammoù don nag hirbadus gant den, en doare ma chomer un tammig diseblant ouzh e vuhez-dezhañ. Muioc'h a vuhez ha muioc'h a

wirionez a zo gant an tudennoù a eil renk, ha n'int ket dalc'het gant teknik kontañ Mikael Madeg. Met a-drugarez d'ar benndudenn, a dap e pep lec'h, e vez taolennet ur freskenn ledan. Kompren a reer aesoc'h a se pegen droch eo ar brezelioù a vez enrollet enno paourkaezh tud ha na gomprenont ket mat petra a c'hoarvez ganto. Prest e vije bet al lodenn vrasañ anezho, hervez doare, da zegemer emdroadurioù sokial hep mont e belbi evit kelo-se. Tud vat hag habask koulz ha tud fallakr ha rastellerien a gaver en div gostezenn a-hend-all. Ar brezel n'eo nemet ur werenn-greskiñ.

Pezh a c'hounezer war dachenn ar wirionez istorel ha sokiologel a goller war dachenn al lennegezh, moarvat. Ne vezer ket dalc'het da vat gant santimantoù kreñv, na gant ur steuñvenn greñv. Livenn-gein

an danevell eo ar gronologiezh-rik a vloaz da vloaz. Ken e teu an dezrevell da vezañ hirik gwech dre vare. Ne dalvez ket e vefe unton al levr. Puilhañ a ra ar beajoù, an emgannoù, al lazhadennoù, ar spioù, an antelloù... hag ar merc'hed, mar plij ! Bourret em eus gant buhez an Indianed hag an drevdien en Amerika, peotramant gant kor-

vigelloù an drafikerien kezeg e Breizh, ha c'hoazh gant meur a daolenn. N'on ket istorour ha n'on ket e-tailh da varn gwirionded studiadenñ Mikael Madeg. Met techet on da deurel kred war ar pep brasañ eus ar pezh am eus lennet e *Dispac'h*, ha dedennus-kenañ em eus kavet al levr er c'heñver-se.

MBdB

**Poèmes de la vie ordinaire,
Barzonegou ar vuhez
ordinal,
gant Louis Grall,
Emgleo Breiz,
130 pajenn, 13,90€**




Komzoù plaen ha gwerzennoù a c'heller kutuilh mesk-ha-mesk e *Barzonegou ar vuhez ordinal*. Dastumet en deus Louis Grall tregont vloaz eus e vuhez en e deskad divyezhek. Levenez, glac'har, spi, estlamm, hiraezh pe truez. Ar vuhez ordinal, ya, gant he boked ganedigezhioù, karantezioù ha kañvoù. Eeun-tre an temoù neuze. Hag eeun ar stil kenkoulz all. Biskoazh ne santer ur c'hoant da rikamaniñ pe da deurel ludu e daoulagad al lennerien. Ar pep brasañ eus ar barzhonegoù-se ne oant ket bet skrivet evit an embann. Eus

lizhiri kuzh dastumet en ur meni deiz-levr ez eus anv kentoc'h. Lennegezh uhel n'eo ket moarvat. Ha koulskoude ez eo plijus barzhonegoù Louis Grall. Santadoù gwirion, kizidigezh fin, gerioù dilorc'h, skeudennoù brav... Rekiye gwellañ ar from don marteze, pa zeu « an oabl da vervel du-mañ en un huanadenn sklêrijenn ».

MBdB

**Yann Fouéré,
Buhezskrid, Biography,
Biographie,
Fondation Yann Fouéré,
104 pajenn, 12,50€**



Er buhezskrid teiryezhsek-se ez adkavomp Yann Fouéré (1910-2011), an emsaver difaezhus-se, “al leon kozh”, gouez da Yann Duchet, en deus graet war-dro an droidigezh vrezhonek. Mat eo e talc’hfe koun ar rummadoù da zont eus aozer *L’Europe aux cents drapeaux*, *Europa he c’hant Banniel*, ul levr diazezet evit neb aduad eus kevreadelezh europat diazezet war rannvroioù kreñv o identelezh. Anavezet eo Yann Fouéré evel saver ar gevredigezh *A.B.E.S (Ar Brezhoneg Er Skol)*, bet krouet gantañ e 1934 a-gevret gant Roperzh Aodig, pa ne oa nemet 24 bloaz, evit ma vefe kelennet brezhoneg er skolioù. Rener ar gazetenn *La Bretagne* e voe ivez Yann Fouéré e-pad an eil Brezel-bed, ma ’z embannas mennozhioù rannvroelour dizalc’h. Sekretour-meur Kengor Kuzuliañ Breizh (*Comité*

Consultatif de Bretagne) e voe, e-ser ar prefed-rannvro Jean Quenette. Ganto e voe kinniget ur Raktres statud evit Breizh pemp departamant e 1943. Direspont e chomas evelato. Trubuilhoù en doe Yann Fouéré gant justis Bro-C’hall goude ar brezel hag e tibabas harluiñ e Bro-Gembre hag erfin en Iwerzhon, ma renas e-pad pell ar Cleggan Lobster Fisheries er C’honnemara. Advarnet ha didamallet e voe e 1955. Unan eus saverien ar MOB (*Mouvement pour l’Organisation de la Bretagne*) e voe e 1957 ha kenderc’hel a reas da embann e vennozhioù a-du gant Breizh hag Europa er gazetenn *L’Avenir de la Bretagne* betek e varv.

Ne zesker ket kalz traoù nevez er buhezskrid berr kinniget deomp gant Font Yann Fouéré. Un diverrañ teiryezhsek n’eo ken, sklaer hag aes da lenn,

ma vo lennet ar pep pouezusañ. Ur c'haierad luc'hskeudennoù a zo bet ouzhpennet e-kreiz al levr evelkent. Ar re o deus c'hoant da c'houzout hiroc'h a

raio o mad eus embuhezskridoù Yann Fouéré e-unan : *En prison pour le FLB, La Partie Interdite* ha *La Maison du Connemara*.

MBdB

Priñsez Marianna,
gant Myriam Guillevic,
Keit Vimp Bev,
36 pajenn, 5€




Merc'h roue Gwened eo Marianna ha deuet eo en oad da zimeziñ. Sed ar pezh a lavar he zad bepred. Hi ne oa ket ar soñj-se war he spered. Ma lavar he zad un deiz e rank dibab unan bennak da vezañ he fried. Mat, d'he mignonez a-vihanik e fell dezhi dimeziñ. Ne blij tamm ebet d'ar roue avat pa ne c'hall

ket ur plac'h dimeziñ d'ur plac'h all. Ha setu penn-kentañ un arridennad dibaboù ha ne vint ket diouzh grad roue Gwened. Fentus a-walc'h eo an danevellig a zispleg plaen ha brav pegen diaes eo dimeziñ pa vez reolennoù un tammig re strizh.

SC

KELAOUENNOÙ



Malo BOUËSSEL du BOURG
Jerom OLIVRY
Tudual HUON

embannet dek, ugent ha tregont vloaz zo er gelaouenn. Da heul e kaver ar pennad-stur hag ur gronikenn *A-c'hin d'ar blev* bet savet gant Paskal Tabuteau hag anvet *Vae Victis*.

Bremañ er bed a zo un dibab pennadoù berr a bep seurt diwar-benn tud pe darvoudoù kuit c'hwitañ war darvoudoù pe nevezentioù pouezus, evel ar *Gerzhadeg enep Monsanto*.

Anavezout ar bed a zo ul lodenn gouestlet d'hor plane-denn douar, d'al lec'hioù kaer, pell pe c'hoazh kevrinus. Ar wech-mañ ez eus kaoz eus Rapa Nui (Enez Pask).

Broioù ha pobloù eo anv al lodenn da heul. An emsavadeg zapatour hag ar Chiapas a lenner

> Bremañ (402)

Gant niverenn 402 **Bremañ** e reer anaoudegezh gant stumm nevez ar gelaouenn. Sklaer ha fonnus eo pajenn an *dTaolenn*, enni un dresadenn fentus gant Tud. Digor eo d'an holl dreserien awenet ha prest da gemer perzh.

Al lodenn *Soñj & disoñj* a laka war-wel ar pezh a veze

ur pennad diwar o fenn en niverenn-mañ.

Evit kaout keloù eus ar vro, adkavit al lodenn *Bremañ e Breizh*. Pennadoù berr pe hir a zo kinniget gant skeudennoù. Dibabet eo bet lakaat war-wel en niverenn-mañ stourmoù Breizh evit an endro : *Douar didoull a-enep ar raktres mengleuzioù*. En div bajenn da heul eo tro *Bevañ e Breizh* gant ar stourm renet e Treger ur pennad zo *Traezh bae Lanuon*.

Bevañ e brezhoneg a laka ar pouez war an nevezentioù diwar-benn ar yezh.

Gouestlet eo an *Teuliad* (ha n'eo ket *Teuliad ar miz ken*, dre m'eo daouvizek ar gelaouenn) d'ar C'hoariva : *Teatr Piba, Strollad Ar Vro Bagan, Mat ar jeu, Tro didro...* A-vicher pe get e tiskouez an teuliad-mañ ez eus birvilh gant ar c'hoariva e brezhoneg !

Div bajenn a zo gouestlet d'al *Levrioù & embann*. Anaoudegezh a reer gant Wolf Haas, skrivagner aostrian romantou polis.

Ar vuhez hep *Sonerezh, sinema ha c'hoarioù* a vefe divlaz. Danvez c'hoarioù video

“a rannoù” a ginniger an taol-mañ.

El lodenn *Sportoù* zo kaoz eus *Ar Frappadigue*, urredadeg tost eus un hentad soudard, n'eus mann ebet da c'hounit nemet al lorc'h bezañ erruet betek penn.

Petra ober, petra gwelet ? ha *Boued* a ginnig un druilhad mennozhioù kuit da enoeiñ ma kavit hir hoc'h amzer.

Kemennadennoù ha kinnigoù a bep seurt a zo er bajenn *Lizheroù & kemennadennoù* a gaver da glozañ ar gelaouenn nevez, enni tremen 30 pajennad dedennus ha kinniget eus ar c'hentañ.

JO

> Al Lanv (134)

Fonnus mat ar pennadoù a c'heller lenn er gelaouenn **Al Lanv**.

Da gentañ emañ pennad-stur rener ar gelaouenn Padrig an Habask : 56 sez a zo aet gant broadelourien Bro-Skos e mouezhiadegoù parlamant ar Rouantelezh-Unanet. Un taol brav. Emañ ar Gatalaniz hag an Euskariz o klask terriñ o c'hazlege ivez. Nag e Frañs ? Kadarnaet eo bet Breizh mac'hagnet ar pevar departamant pa oa bet adframmet ar rannvroioù. « Tremen poent eo da Vreizhiz kompren n'eus netra da gaout digant ar strolladoù politikel pellurzhiet a Bariz hag e rankont en em unaniñ evit gellout bezañ int o-unan war o douar, gant o gwirioù, hogen a-genskoazell gant pobloù all ar bed, » eme P. an Habask.

Goude-se emañ homelienn Yann Talbot bet distaget gantañ da geñver obidoù Riwanon Kadoret. Ur pennad fromus a zo ivez gant he mignonez a-gozh Lena Morin.

Goulennataet e oa bet Daniel Kernallegenn a oa war ar renk evit an dilennadegoù Kanton e Brieg. « Kavout a a ra din e

ranker en em silañ er muiañ posubl a lec'hioù e-lec'h ma vez kemeret divizoù a sell ouzhompholl, » emezañ.

Abaoe bloaz e oa start an traoù e *Ti ar C'hoadoù* er Chapel-Nevez ha nevez zo ez eus bet kaset kuit 9 implijad.

Kendelc'her a ra Yann Talbot gant e bennadoù kentelius war an darempredoù etrekeltiek e Breizh. En dro-mañ ez eus kaoz eus ar prantad etre an daou vrezel.



Paol ar Meur a laka ar gaoz war an dud vrudet bet o vrezel-liañ en estrenvro : markiz Lafayette, Gordon Byron, Markiz ar Roueri ha meur a hini all.

Lenñ a c'heller ivez ur pennad bet savet gant Ronan an Henaff diwar-benn Pierre Fertil, bet prizoniad en Alamagn.

Fonnus ivez ar pennadoù el lodenn lennegel. Evel kustum ez eus pennadoù barn berr gant Alan Botrel diwar-benn al levrioù bet kaset d'*Al Lanv*. Barzhonegoù a zo ivez : *Digarantez* gant Paskal Tabuteau, *Shoah* ha *Charlie hepto* gant Kervalan, *Overdose* gant Anna Canavet, *Aet out*, *goustadig* hag *Ar bos* gant Jean-Yves Geffroy. *Hervez va zad-kozh* a zo un danevell verr bet skrivet gant Jarl Priel. Un dornskrid bet embannet er gelaouenn *Skrid*, niverenn 37.

Gant *E korn ur stalenn*, kronikenn Daniel Doujet ez eus anv an dro-mañ eus Yann-Vari Heneu, person Lovedan (Lanvaodan), bet skrivet gantañ *Bouraplited en tiegezh*, *Gweladenn Tondal*, *Anken an Nibelungen*, *Buhez Sant Kolmkel*, *Ar Graal Santel*.

Judith Francks, studierez bloavezh kentañ e Skol-Veur Roazhon 2 a ginnig deomp ur studiadenn, savet mat ha dedennus-tre, war levr Youenn Drezen *Sizhun ar Breur Arturo* bet embannet gant *Al Liamm* div

wech ha nevez embannet gant *An Alarc'h Embannadurioù*.

Gwendal Denez en deus savet ur pennad diwar-benn Alun *Sbardun* Huws aet da Anaon da vare Nedeleg. Gantañ hag e vignoned e oa bet krouet ar strollad *Y Tebot Piws*. Gwendal a oa bet o vevañ e memes ti gant Alun pa oa studier e Caerdydd. Tapet en doa ar strollad brud e Kembre gant kanaouennoù evel *Blaenau Festiniog*, *Yr Hogyn Pren*, *D'yn Ni Ddim Yn Mynd I Birgmingham*.

Teir c'hanaouenn e kembraeg bet savet gantañ a ginniger deomp.

TH

> Musique bretonne (243)



Keloù a roer d'al lennerien eus an dud aet da Anaon e bed ar sonerien ha kanerien : Erwan Roparz ha Louis Lallour, kaner kan-ha-diskan eus Plourac'h. Anv zo ivez eus an ti produiñ ha skignañ pladennoù : *Paker Prod*. Emañ Yann Pelliet e penn (ober a ra war-dro aozañ Gouel al levrioù e Karaez ivez) ha kroget eo gant al labour-se gant ar strollad *Startijenn*. 15 pladenn a zo bet skignet dija, *Rhapsoldya* en o zouez. « Hep brezhoneg, Breizh ebet, » eme Yann Pelliet er pennad-kaoz, liammet start eo ar produiñ pladennoù gant ar sevenadur hag ar yezh. Ur

bladenn all gant ar strollad *Startijenn* a zo war ar stern.

Ur pennad hir a zo bet savet diwar-benn Jañ Mai 'n Nent (Jean-Marie Le Neindre e galleg) bet ganet e Boulvriag e 1838. Labourer-douar e oa ha tapet en doa brud abalamour d'ar c'hanaouennoù a veze skrivet gantañ e brezhoneg : *Disput etre an Tregeriad hag ar C'hernevad, Ar filhorez, Chañson an Amourousted, Soubenn al laezh...*

Martial Le Corre en deus bet digarez da zastum ur bern kartennoù-post, warno sonerien Breizh an amzer dremenet. 300 dioute en deus gallet dastum ha diwar-se en deus graet un toullad brav a enklaskoù kement a gouzout piv e oant. Diwar-se en deus skrivet ul levr *Les sonneurs de Bretagne* e 2013.

TH

> Brud Nevez (309)

Gant niverenn 309 **Brud Nevez** eur pedet da ergerzhet broioù ar skorn : Norge, Danmark, Island, Sued, Skandinavi... gant kalzik skeudennoù brav. Eus ur bourmenadenn ez eus anv kentoc'h eget eus ur studiadenenn rik : eñvorennoù, testenioù, kustumoù, dremm-vroioù... Ur veaj en amzer eo ivez, eus an eil Brezel-bed betek ar besketaerien voru war-dro an Douar-Nevez. E-kerzh mareajoù an Island ez eus bet 400 goleetenn oc'h ober peñse en ur ober 80 vloaz, ha 4 000 pesketaer a varvas dre veuz. Ur pennadig a zo gouestlet ivez d'ar romantoù polis a builh e broioù an norzh hiviziken hag a zo priziet brav en hor bro.

N'eus rann lennegezh ebet en niverenn-mañ, met ur doser ispisial diwar-benn ar gwalldaol a oa bet skoet *Charlie Hebdo* gantañ e deroù ar bloaz.

Gant ar pennad-kaoz kreiz e reomp anaoudegezh gant Jean-Paul Guyomac'h : soner akordeoñs, arbennigour war biologiezh al loened ha doareoù al labour-douar, hag ezel oberiant er gevredigezh *Dour ha stêrioù Breizh* abaoe m'eo bet savet

gant Jean-Claude Pierre e 1979. Istor e vuhez hag e stourmoù a gonter deomp.

E fin ar gelaouenn eo bet lakaet ar gaoz war levr nevez



Gilles Simon : *Plogoff, une lutte exemplaire ?* Raktres ar gouarnamant d'an ampoent a oa sevel « 200 kreizenn nukleel a-benn ar bloavezh 2000 ! » Degas a ra Gilles Simon da soñj penaos « diou wech, e miz meurzh hag e miz gwengolo 1975, o-doa embannet a-unvouez ar Huzul ekonomikel ha sokiel ha Kuzul-rannvro Breiz e oant a-du gand raktres sevel ur greizenn nukleel er rannvro ». Hogen maer Plogoñ ne oa ket bet kelaouet e oa bet dibabet e gumun. Ha lennet ar c'heloù gantañ er gazetenn...

MBdB

> Pages de Bretagne (39)



Emañ poltred Goulc'han Kervella war golo ar gelaouenn hag e-barzh ez eus ur pennad (e galleg) ma tispleg penaos eo kroget da zeskiñ brezhoneg, krouidigezh strollad *Ar Vro Bagan* e 1965, penaos eo kroget da skrivañ e brezhoneg. Lenn a reer ivez ez eus ur romant gantañ war ar stern *N'eus ket a garantez eurur* un istor karan-tez e-pad ar brezel 14.

Daou boltred all a zo kinniget ivez : Krismenn ar c'haner ha René Tanguy al luc'hskeudenner.

Kaoz zo ivez eus Bro-Finland ar vro ma 'z eus ar muiañ a lennerien yaouank en Europa.

67% eus ar Finlandiz a gustum amprestiñ levrioù el levraouegoù. Dav lâret ez eo digoust al levraouegoù. War-dro 14 000 levr a vez embannet bep bloaz e teir yezh : finneg, swedeg ha sami. War-dro 4 500 dioute a zo levrioù nevez.

Teuliad an niverenn-mañ a zo bet savet gant Gérard Alle : *La création en langue bretonne*. Kaoz a zo gantañ eus Annie Coz, Aziliz Bourges, Mich Beyer, Gweltaz Adeux, Yann Fulub Dupuy, Nolwenn Korbell hag evit echuiñ strollad *Ar Vro Bagan* ar gevredigezh C'hoariva, *Groupe Ouest*, *Stumdi*, *Dizale*, *Daoulagad Breizh*.

TH

> Breizh da zont (517)

Meur a bennad e brezhoneg a c'heller lenn er gelaouenn renet gant Thierry Jigourel. Ar pennad kentañ a zo bet skrivet gant Emile Granville diwar-benn an tailhoù lec'hel. Digresket e vo ar roadennoù Stad d'ar strollegezhioù lec'hel pa ya an dispignoù war greskiñ.



Ha degouezht omp e Rouantelezh Big Brother ? eme Fañch Kerrain en e bennad. Al lezenn war an titouriñ a zo o paouez bezañ votet e Bro-C'hall ha kement-se a ro aotre d'ar Stad da evezhiañ ar bobl a-dost. Arabat fallgaloniñ memestra, emezañ c'hoazh, rak « ar rezid (ar frankiz diabarzh) zo anezhañ

ar merk donañ eus anien an den. E mareoù pouezusañ hon buhez e c'haller dalc'hmat divizout war an hent a venner dibab ».

Yann Duchet en deus skrivet ur pennad hir diwar-benn levr Gwenael Maze, embannet gant Aber : *Emsav hag istor hag ur pennadig berroc'h* war levr Stephen King *Shining* bet lakaet e brezhoneg gant Olivier Biguet.

Ur pennad-kaoz dedennus a zo ivez (e galleg siwazh) gant Herve Sebillé Kernaoudour diwar-benn e labour war dornskrid Vallée (*Dictionnaire du Breton du Trégor-Goëlo*) hag ivez diwar-benn an doare m'eo deuet da dommañ ouzh ar brezhoneg ha da zeskiñ ar yezh da vat. Komzoù dastumet gant Servane Huonic.

Ul lec'hienn nevez a zo gant ar gelaouenn :

<http://lavenirdelabretagne.org>

TH

> Le Peuple Breton (616-617)



Serge Le Quéau en deus skrivet ur pennad diwar-benn stourm hir ha poanuis pevar implijad ar *Coop agricole Nutrea Triskalia* (e dalc'h an *FNSEA*). Kontammet e oant bet gant louzoù pistrus ha skarzhet e oant bet kuit eus al labouradeg abalamour d'o c'hleñved.

Ouzhpenn 50 vloaz zo e oa bet krouet ar gelaouenn *Le Peuple Breton* ha setu ma kin-niger d'al lennerien disoc'hoù an enklask a oa bet kaset da benn.

Aterset eo bet Ousmane Tienrébeogo eus ar Burkina Faso lec'h m'emañ *Monsanto*

oc'h en em staliañ evel e meur a lec'h all en Afrika. Roet ez eus bet ar gaoz da Herve Le Gal, mouezh aotreet ar gevredigezh *Ingalañ* a stourm a-enep ar Bevedeg Hilzas-Kemmet (BDH [OGM]).

Gael Briand en deus dastumet komzoù Dewi Siberil (e galleg) da geñver 10 vloaz *Ai'ta* !. Ober a reont evel ma oa bet graet gant *Stourm ar brezhoneg*, arouez ar stourm evit ar yezh e Breizh. Gwall start eo lakaat ar brezhoneg warwel er servijoù foran avat. « Daoust hag ober a reomp ar pezh zo ret evit ma chomfe bev hor yezh ? » eme D. Siberil.

El lodenn vrezhonek e c'heller lenn ur pennad gant Paol ar Meur diwar-benn ar *Front National* hag emdroadur ideologel ar strollad. Ha pa vefe Marine Le Pen o terc'hel ar stur bremañ eo chomet an *FN* ur strollad eus an tu dehoù pellañ.

Maxime Touzé en deus savet ur pennad : *Reiñ e wad*. Daoust m'eo kelaouet mat an dud bremañ war an ezhommoù, n'eus ket kalz a dud o reiñ o gwad evit gwir. Rannvro Breizh (4 departamant) eo an eil rannvro e Frañs a ro ar muiañ a wad. Diwar-benn ekonomiezh ez eus

kaoz gant Nil Caouissin eus reolennoù direizh ar c'henwerzh en Europa. « Penaos chom unvan war an dachenn politikel pa glask pep bro distruj ekonomiezh ar re all, » emezañ en e bennad.

Pevar levr a zo bet burutellet gant Herve Lannuzel en e bennad *Du ha Gwenn ha plas da lenn...* hag en o zouez *Mer-c'hed gwisket e du* gant Riwal Huon (emb. *Al Liamm*). Un diverrañ eus niverenn 409 ar gelaouenn *Al Liamm* a c'heller lenn ivez.

El lodenn istor ez eus anv eus Jacques Cambry (1749-1807) : *L'inventaire de la Bretagne*. Aozet eo bet ar pennad gant J. A. Le Gall. Evit Cambry e oa ar brezhoneg ur skoilh war hent an araokaat. Ar Vretoned o doa dalc'het d'o yezh, ha dismegañsiñ a raent ar C'hallaoued ivez ha gant-se ne c'helled ket skignañ mennozhioù nevez degaset gant ar Brederouriezh.

Levr ar miz, bet dibabet gant J. J. Monnier, a oa *Réunifier la Bretagne ? Région contre métropole ?* Embannet gant *Skol Vreizh*.

« Ur mennad-lezenn ankenius evit respont da anken an dud ». Sed aze pennad Gael Simon e lodenn vrezhonek an niverenn 417 diwar-benn *Lezenn an Ditourerezh* votet e kambr ar gannaded. Ul lezenn savet fall, dañjerus evit hor buhez prevez, ul lezenn a c'hellfe bezañ implijet evit stourm a-enep ar mennozhioù politikel. Roet e vez dreistgalloudoù d'ar c'hentañ ministr ivez.



Maxime Touzé en deus savet ur pennad diwar-benn ur strollad nevez e Bro-Saoz : *Yorkshire first*. An “Devolution” a fell d'ar strollad nevez-se kaout hag ur parlamant evel e Bro-Skos.

Korn Riwa : En Aostria e vez profet gwispid ha madigoù da

baotred ha merc'hed al lizhiri evit diarbenn tagadennoù ar chas.

Paol ar Meur en deus savet ur pennad e koun an Armeniz bet drouklazhet kant vloaz zo e Turkia. Degas a ra da soñj d'al lennerien e oa bet embannet e brezhoneg un destenn a denn d'ar ouennlazh-se : *Steudad an Ankoù* gant Haroutioun Mertchian (*Hor yezh* 2005).

Pemp levr a zo bet burutellet gant Herve Lannuzel en e bennad *Du ha Gwenn ha plas da lenn...* : *Veilokoja* gant André Baumpy, lakaet e brezhoneg gant Goulc'han Kervella ; *Vodoù zo amañ* ul levr bannoù-treset gant

Valériane Duvivier, lakaet e brezhoneg gant Stefan Carpentier ; *Ar soner hag ar bleiz*, testenn gant Goulc'han Kervella ha tresadennoù gant Anna Duval Guennoc ; *Kael ag ar gorriganed* gant Mael Poullossier ; *Re an tu all* gant Yann-Fulub Dupuis hag ar strollad *Tro-Didro*.

El lodenn e galleg ez eus un teuliad a-bouez bet savet gant Gael Briand diwar-benn emnerezh demokratel Rojova (Kurdistan e Bro-Siria). Betek eno e oa bet Gael gant ar gevredigezh Mignoned ar Gurded e Breizh.

TH

> Bro Nevez (134)

Krouet e oa bet an *International Committee for the Defense of the Breton Language* e Brusel e 1975. Ar skourr amerikan a oa bet krouet e 1981. Henri Lecuyer a zo aet da Anaon e miz Meurzh 2015, setu m'eo Ivo Peeters ar sekretour-meur hiziv an deiz. « *The need remains for international awareness of the challenge Breton speakers still face in light of French government resistance to real changes. The*

need also remains for an international community to speak out in support of breton working for the future of their language and culture. How can the ICDBL best serve to support Bretons ? »

« Ezhomm zo c'hoazh lakaat war-wel dre ar bed-holl ar stourm a rank ar vrezhonegerien kas da benn en askont da emzalc'h ar gouarnamant gall a zinac'h dezho o gwirioù. Ar gevredigezh etrebroadel a rank lakaat splann ar fedoù-se evit skoazellañ ar Vretoned a labour

evit amzer da zont o yezh hag o sevenadur. Gwellañ doare evit an ICDBL da skoazellañ ar Vretoned ! »



Kaoz zo ivez eus ar rouedad hag al lec'hienn (<http://www.npld.eu>) aozet evit lakaat war-wel ar yezhoù niverus en Europa ha yezhoù ar minorelezhioù. Ar FUEN krouet e Pariz e 1949 (*Federal Union of European Nationalities*) en deus ul lec'hienn a-bouez ivez : www.fuen.org.

E saozneg e tispleg Lois Kuter petra a vez graet gant *Ai'ta !, Breujoù Breizh*, an *Ubapar* ha kelaouiñ a ra al lennerien e oa bet aozet ar c'hentañ stal-labour en-dro d'ar brezhoneg e skol-veur Harvard

a-drugarez d'an emglev a oa bet aozet etre Skol-Veur Roazhon 2 hag ar skol-veur amerikan. Yann Bevant, Ronan ar C'hoadig, Stefan Moal, Gwendal Denez hag Erwan Hupel a oa bet o komz diwar-benn yezh ha sevenadur, politikerezh, al liammoù etrekeltiek ha Breizh en XXI^{vet} kantved.

Renablet ha burutellet he deus Lois Kuter un toullad levrioù bet embannet e galleg war an diwezhadoù : *Ils ont fait la France - Contre-Enquête- De Clovis ha Charles De Gaulle*, bet skrivet gant Jean-Pierre Le Mat, *La gauche et la Revendication Bretonne* gant Georges Cadiou, *Langues Régionales – Au bord du gouffre ? - De l'utilité de « nationaliser » les langues régionales*, skrivet gant Thierry Kranzer. Embannet an tri anezho gant *Yoran Embanner*.

Deep Inside a breton skull (J.P. Le Mat) a zo em gavet gant 45 pennad : *In the shadow of Saint Judicaël*.

Lec'hienn : www.icdbl.org.

TH

HOR MIGNONED

E-kerzh miz Ebrel eo aet hor mignon Dewi Morris Jones da Anaon. Trumm ha dic’hortoz oa bet e varv. War e leve e oa goude bezañ labouret e-pad pell evit *Cyngor llyfrau Cymru* e kêr Aberystwyth. War ar stern e oa gantañ ur studiadenenn war ar brotestanted e Breizh. Evel meur a studier all em boa graet anaoudegezh gantañ pa oa lenner war ar c’hembraeg e Skol-veur Brest. Un den sioul, hegarat ha madeleus e oa e pep keñver. Digarez em boa bet d’en em gaout gantañ e Kembre goude-se meur a wech ha bep tro hor boa bet un degemer c’hwec’h gantañ. Kaoz a veze ganeomp alies eus an embann evel-just pa oa-eñ un arbennigour war an dachenn-se e Kembre. Lakaet en doa embann e kembraeg – gant skoazell Mikael Madeg – un dastumad barzhonegoù modern bet skrivet gant Bretoned dindan an titl *Du ha Gwyn*.

Tudual Huon

PROFOÙ

Miz Ebrel : Yannick LE PORT ; Patrick PUIREUX ; Dr Yves GOURVES ; Yann-Fañh KERNEIS ; Jan-Mai ha Mai-Gristin GWERNHALEG ; Paskal TABUTEAU ; Paol AR MEUR ; Maryvonne CUDENNEC ; Philippe CERCEAU ; Luc BIDEL

— War un dro : 160€

Miz Mae : Iwan AR FUR ; Jean-Luc GUINAMANT ; Joseph POULIQUEN ; Patrick LE BOEUF ; Pol Yvon VIROT ; Paskal HERVIO ; Jacqueline GIBSON-BIDARD ; Marc GUIRIEC

— War un dro : 170€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

LIZHEROÙ

Lizher digant Fulup Lannuzel

« Emaon o paouez peurlenn levr diwezhañ Herve Gouedard *A-dreuz ar c'hantvedoù*, embannet gant *Al Liamm*.

Ur mailh war an danevellañ eo an aozer, gouest d'hol lakaat da dridal diwar divoudoù liesseurt, gweledvaoù, tudennoù, darvoudoù, hep enoiñ al lenner gwech ebet. Kavet em eus dreist da skouer e eñvoradenn eus Julien Ofray de la Mettrie, bet ganet e Sant-Maloù, mezeg ha prederour *libertin* eus an XVIII^{vet} kantvet ; ken barrek eo Herve Gouedard hag an istorour-prederour Julien Jerphagnon, arbennigour war istor ar preder en hened, da ober anv eus danvezioù diaes gant komzoù brav.

Dudius ivez e zoare da venegiñ kaereded ar vro (*War droad eus Gurunuhel da Vulad-Pestivien*), a c'heller merzout en ur vont war droad, hep kaout ezhomm da vont da Djerba, evel kalzik a dud a blij dezho diskouez o beajoù kaer ha goullo...

A galon »

DIFAZIADENN

War niverenn 409 *Al Liamm* e oa bet embannet *Afer an unkorneg glas*, un danevell gant Agustin Fernandez Paz. Tre e-kichen an titl avat e oa chomet diwar fazi anv Alvaro Cunqueiro. Ra vimp digarezet evit ar mank-se.

GOUEL BREIZH

Setu ar 7^{vet} gwezh eo bet dalc’het *Gouel Breizh*. Ouzhpenn 150 emgav sevenadurel a zo bet aozet etre ar 16 hag ar 25 a viz Mae. Kalz a dud o deus labouret evit reiñ buhez ha lakaat war-wel pinvidigezhioù liesseurt hor bro : 120 aozer ha 7 000 skoazeller a youl vat ! Estreget e Breizh e oa gouel : er Stadoù-Unanet Amerika, Viêt Nam, Sina, Mec’hiko, Roumania, Slovakia, Iwerzhon, Bro-C’hall... Bretoned ar bed hag o mignoned a zo niverusoc’h-niverus o ’n em vodañ hag o lakaat o gwrizioù da vleuniañ. Gant skoazell Rannvro Breizh oa bet lañset *Enezeg Glad Breizh* e 2014, ar pal a zo talvoudekaat ar glad breizhat a-dreuz ar bed. Gwer livet iliz-veur Ho Chi Minh er Viêt Nam a vo nevesaet ha brudet. Ret eo menegiñ emañ an iliz-veur gatolik-mañ dindan gwarez Sant Erwan ha Santez Anna.

.BZH

Tamm-ha-tamm e weler chomlec’hioù gant an astenn .bzh. Digoret e oa bet da gentañ d’an embregerezhioù ha d’ar c’hevredigezhioù. Abaoe Kerzu 2014 e c’hell neb a gar kemer an anv-se.

Rannvro Breizh he deus kemeret ar pik.bzh e miz Meurzh. Kêr Kemper he deus graet kement-all.

Salv ma vo gwelet muioc'h-mui en-dro deomp koulz gant ar bed prevez pe bublik.

KLEWELED

Penaos reiñ lañs ha bodañ an nerzhioù kleweled ? Anv a zo eus ur chadenn “rannvroel” ur pennad zo c’hoazh. Ur chadenn war Internet, na vije ket war skrammoù ar skinwel. Dilennidi ar Rannvro a glask fetisaat an traoù ha lakaet o deus en-dro d’an daol produerien ha skignerien a vicher hag ivez kevredigezhioù : *France télévisions*, *TVR35*, *Tébéo*, *Tébésud*, *Brezhoweb*, *Daoulagad Breizh*, *Dizale*, *Breizh Créative* ha *Films en Bretagne*. N’eus netra resis evit ar mare, lâret o deus e vefe taolet pled ouzh yezhoù Breizh.

10 VLOAZ Ai'ta !

Dek vloaz zo oa bet krouet *Ai'ta !* e Lannuon gant ur strolladig tud yaouank. O fal ? Reiñ d’ar yezh he flas, er gevredigezh, er vuhez publik ; evit ma vefe doujet ouzh ar re a ra gant ar brezhoneg eo ret kaout ur statud ofisiel evit ar yezh. Dibabet o deus doareoù stourm nevez a-walc’h betek-henn dre amañ ha war un ton fentus ha laouen eo e kasont o stourm war-raok, gant doareoù difeuls. En tiez-gar, tiez-post ha war an hentoù e vezont gwelet peurliesañ gwisket gant o rochedoù orañjez.

War-dro 1 000 a dud a oa bet betek Tremargad d’ar Sul 24 a viz Mae evit gouel 10 vloaz ar strollad-se, distag eus kement aozadur all a zo. Xavier Renou, unan eus diazezerien ar c’henstroll *Désobéissants* en doa displeget e galleg ar perag hag ar penaoz disentiñ. Da c’houde oa bet roet ar gaoz da Fulub Kadored hag Iwan Kadored evit displegañ petra oa *Stourm ar Brezhoneg*, da Lena Louarn evit deroù *Skol an Emsav*, da dTrefina Kerrain, Tangi Yekel ha Dewi Siberil evit *Ai'ta !* Bernez Tangi en doa kanet 2

ganaouenn e-kerzh ar c'hendiviz. E keit-se e oa c'hoarioù ha standoù a bep seurt er maez. Ur fest-noz hag ur sonadeg a oa evit klozañ an devezh.

Emgav digor d'an holl a vo d'an 19 hag 20 a viz Gwengolo evit eskemm war ur c'houlzad stourm nevez hag ur strategiezh da gas war-raok.

Menegomp levr Xavier Renou *Désobéir, le petit manuel* bet troet e brezhoneg gant Dewi Siberil ha deuet er-maez e ti *An Alarc'h Embannadurioù*, dres da vare gouel 10 vloaz *Ai'ta !*

PRIZ LENNEGEL AR BONOÙ-STEN KIDNA _____

D'ar Sadorn 6 a viz Even oa bet roet ar priz. Laouen eo skipailh *Al Liamm* o kemenn eo *Yudal !* bet savet gant Erwan Hupel a zo aet ar maout gantañ. Gourc'hemmennoù d'hor c'henvroad ha keneil.

War ar renk e kaved :

- *Ar waremm vras* – Youenn Kervalan – *Al Lanv* – 2013
- *Bigorned sukr ha bara-mel* – Fañch Peru – *Skol Vreizh* –

2014

- *Bizied Eva* – Yann Fulub Dupuy – *An Alarc'h* – 2013
- *Koll atav* – Gégé Gwenn – *Skol Vreizh* – 2013
- *Milendall* - Yann Fulub Dupuy – *An Alarc'h* – 2013
- *Yudal !* – Erwan Hupel - *Al Liamm* – 2013

BREIZH 5/5 _____

Ur strolladig tud a Vro-Dreger o deus lakaet en o soñj brudañ youl ar Vretoned evit Breizh klok gant 5 departamant. Evit se o deus embannet pegsunoù, plakennoù, Tshirtoù, seier kotoñs... Prest int da skoazellañ an tiez-kêr da sevel panelloù da skouer. Estreget an hiniennoù a c'hell diskouez o youl ; ar stalioù, embregerezhioù,

artizaned, kevredigezhioù, strollegezhioù hag all a c'hell stagañ ur blakenn ouzh dor o savadurioù, o burevioù, o salioù...

Ur rouedad *Breizh 5/5* niverus, sed ar pal.

<http://breizh5sur5tumblr.com>

KERVARKER

Ganet oa bet Kervarker e Kemperle d'ar 7 a viz Gouere 1815 ha marvet d'an 8 a viz Kerzu 1895 e Kemperle ivez. Ar bloaz-mañ vez lidet 200 vloaz e c'hanedigezh ha 120 vloaz e varv. Un digarez da lenn hag adlenn ar *Barzhaz Breizh*.

16^{VET} KENSTRIVADEG SKRIDOÙ BREZHONEK REDON

Leun-chouk e oa sal vras ti-kêr Redon evit lidañ 16^{vet} kenstrivadeg skridoù brezhonek, d'an 11 a viz Mae 2015. Pemp rummad a zo evit ar genstrivadeg aozet gant *Kevredigezh Vreizh (Association Bretonne)* bet krouet gant ar Redonad Bernard Bonraisin. Ar skolioù kentañ derez, ar skolaжоù, al liseoù, oadourien ar c'hente-lioù-noz, ar vrezhonegerien varrek. Kemer a ra perzh ennañ klasoù divyezhek Bro-Redon ha skol Diwan Kistreberzh. Met digor eo d'an holl vrezhonegerien, ha bep bloaz e tegemer ar juri testennoù o tont eus pemp korn a Vreizh.

Prezidantez ar juri eo Yvonne Coz eus Naoned, skoazellet gant Garmenig Ihuellou-ar Menn eus Sant-Brieg, Tanguy Legâvre eus Brezheil, ha Herve Gouedard eus Plerin. E-pad meur a vloaz he doa gounezet Annie Coz ar genstrivadeg, ken eo bet degemeret evel ezelez ar juri ar bloaz-mañ. Levrioù a vez roet d'al loreidi ha kiboù ivez ouzhpenn d'ar re yaouankañ. En o zouez al levr *Bili er Mor* bet skrivet dres gant Annie Coz, priziet gant *F3 Breizh* hag *Ofis Publik ar Brezhoneg*. Dodenn ar genstrivadeg a oa « Aodoù ha riblennoù ar mor ».

Setu amañ da heul disoc'hoù ar bloaz-mañ :

SKOL ITRON VARIA REDON - CM1 :

Kentañ priz : Nolwenn SICARD

Eil priz : Mael CHAMAILLARD

Trede priz : Mathis JALLE

SKOL ITRON VARIA REDON - CM2 :

Kentañ priz : Mona BOURGES

Eil priz : Hugo BETTON

Trede priz rampo : Marguerite PICHON ha Rozenn ABEGG

SKOL KISTREBERZH :

Kentañ priz : Mael LE CHEVALIER (*Ar surf hag ar petrol*)

Eil priz : Younis JOLIVET hag Odran LE RALLIC-MAHO (*An tsounami petrol*)

Trede priz : Mauve GARCIA-CREPIN ha Salomé LE FLOC'H-PETIT (*Ar bezhin glas*).

SKOL HENRI MATISSE :

Priz kêr Redon d'ar c'hlasad a-bezh

SKOLAJ AR C'HLEU-SANT-JOZEB - 6^{VET} HA 5^{VET} KLAS :

Kentañ priz : Awena GRANVILLE-KELLE (*Arya ha Rouanez ar mor*)

Eil priz rampo : Lea BETTON (*An douristed hag ar vi poc'han*) hag Enora GUILLOTTEL (*Beaj ur silienn*)

Trede priz rampo : Lola NICOL-SEVESTRE (*Ar chevreenn Titi hag ar rinkin*) hag Annael LE BRAS (*Tsounami*)

SKOLAJ AR C'HLEU-SANT-JOZEB - 4^{RE} HA 3^{DE} KLAS :

Kentañ priz rampo : Louise PICHON (*Al lizher kevrinek*) ha Maria LUGUÉ (*Piv a ro a gentel bouezusañ etre al lizher ha Mab-den ?*)

Eil priz rampo : Erwan SICARD (*Al loen iskis*) ha Nolwenn
TOURNEUR (*Ar vouezh kozh*)

Trede priz : Gwennan LE MOIGNE ha MELISSA BEDANE
(*Mael hag e dad*)

TUD GOUR - DESKARDED :

Kentañ priz : Floriane DUROT hag Armelle DE SAINT-
AUBERT (*Un enezenn gant un tornaod bras*)

Eil priz : Mazhev COVIAUX (*Aodoù ha riblennoù ar mor*)

Trede priz : Pauline PHILIPOT

BREZHONEGERIEN AMPART :

Kentañ priz rampo : Annaig KERVELLA (*E gwasked an tevenn*)
ha MAI-EWEN (*Aodoù ha riblennoù ar mor*)

Eil priz : Arthmael GIRAUDON (*An dihun*)

Trede priz : Alain BREMONT (*Ar vered war an aod*)



An holl re bet priziet er genstrivadeg

Kemer perzh er genstrivadeg ?

Un dodenn personeloc'h un tamm, a vo kinniget e 2016 : « Un dra bennak dister evit ar re all, met a-bouez-tre evidoc'h ». Gellout a ra an destenn bezañ dornskrivet pe vizskrivet, pe kaset dre ar genrouedad. Ne vo ket an destenn hiroc'h eget ur bajennad bizskrivet. Gellout a reot kas ho testennoù dre lizher: Association Bretonne, 10 straed Gaston Sébileau e Redon, pe dre bostel: associationbretonnekenstrivadeg@orange.fr; kent hanter-miz Meurzh 2016. Amzer zo enta da skrivañ ur vray a destenn vihan.

Emile Granville